

1000skouerenn  
adalek  
AR SIZHUNMAÑ

# AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

Niverenn 22 2bajenn  
2vet bl. bep gwener

Mererezh, Skridaozerzh:  
2 straed ar Richardiere  
35100 ROAZHON  
CPPP 62319

## KEMBREIZ HARZET GOUDE TANGWALLOÙ

E TIEZ-HAÑV

gant Alan HEUSAFF

E'N AMZER ar 4 a viz Ebrel e lavaren e oa dianav c'hoazh an deverien diez-hañv kembreat.

A-benn neuze koulskoude e oa bet harzet e-leizh a dud un tammig e pep lec'h dre Gembre: sachet e oa bet darn er-maez eus o gweleoù a-raok gouloù-deiz d'an 30 a viz Meurzh, hag e-pad an daou zev-ezh da heul e oa bet paket re all. En o zouez da vihanaf ugent ezel eus ar gevredigezh COFIWN (Dalc'homp Sofj) hag he deus kemeret da gefridi atizafi an emskiant vroadel e Kembre en ur aozafi lidou-efvorif, hag en ur embann skridoù en enor da gembreiz brudet en abeg d'o stourm evit frankiz ar vro. Bep bloaz e ez ganto, da skouer, un tolpadur e Cilmeri, e gevred Kembre, e-tal ar peulvan savet eno en enor da Llewelyn Fawr, lazhet gant ar Saozon e 1282. Dres d'an 29 Meurzh e oa bet dalc'het bodadeg-vloaz COFIWN: e Machynlleth, en un ti dediet da eñvor Owen Glyndwr, a stourmas e-pad bloavezhioù e derou ar 15vet kantved evit dieubif Kembre.

Pevarzek eus ar re harzet a oa anezho kargidi COFIWN: ar c'hoariad, ar pennsekretour (John Jenkins, bet 8 vloaz bennak en toullbac'h en abeg d'e obererezh dre heg), un den e-karg eus an enklaskoù, h.a. Gwallgaset e voent ha gret "sponterien" anezho; furchet o ziez; skrapet diganto a bep seurt skridoù, dielloù, rikoù-burev an aozadur. A-walc'h evit diskar hemañ evit ur pennad mat.

Koulskoude ne oa urzh ebet d'o herzel. Goude daou pe dri devezh e voent holl, war-bouez unan, laosket da vont. Pevar a zo tamallet dezho evelkent bezañ bet perzh en tagadennoù ar goañv tremenet.

D'ar 5 a viz Ebrel e reas COFIWN un diskleriadur o klemm eus doareoù ober ar bolis e-keñver un aozadur hag a bleustr an hentenoù bonreizhel ha demokratel. Goulenn a reont e ve daskoret an dielloù hag ar rikoù-burev dezho.

Kredif a ra COFIWN e voe harpet ar bolis gant ar BBC. Digor e oa ar C'hendalc'h d'ar

## Ur brezegenn vrezhonek a zo bet graet e Truro (Kernev-Veur) gant Ur C'hernevad goude ur sonadeg

Ar brezegenn da heul a zo bet graet en ilizveur TRURO (Kernev-Veur) d'ar 16 a viz Ebrel gant an Ao George, e brezhoneg, dirak an eskop hag an arvesterien. Goude an abaden roet gant laz-kanañ "Kanerien Sant Karanteg" (Penn-ar-Bed) hag An Dregeriz (eus Lanuon) e oa.

"An Aotrou eskob, an Aotrou maer, Breizhiz ha Kerneviz, noz vat d'an holl. Laouen omp bet da zegemer ac'hanoc'h, amañ, en ilizveur Truro, kreiz-gelaouennerien, met ar BBC ne oa ket bet kouviet. Goulenn ha kaout a reas aotre da evezhiañ ha da filmañ ar bodadennoù.

Da veno darn eus ar gendalc'hidi e oa arvarus. En he danevell e pouezas ar BBC dreist-holl war ar c'hraf o tennañ d'an daou Gembread a voe lazhet e 1969 en Abergele, pa darzhas ur vombezenn hag a oa en o dalc'h. Evel-se e tiskouezed COFIWN evel un aozadur a-du gant an nerzh hag an heg. Diouzh komzoù an di-rouderien pa oant o c'houlennata ar re harzet e c'helled dastum o doa gwelet ar film graet gant ar BBC. Damgredif a ra paotred COFIWN e oa di-rouderien zoken e laz ar BBC. M'en deus c'hoant ar servij-mañ da zislavarout an tamall-se n'en deus nemet reif anvioù ha luc'hskeudenoù izili al laz-filmañ ha diskleriañ abaoe pegeit emaint o labourat evit-añ.

Evit a sell ouzh an daou zen lazhet en Abergele, anaouta ra COFIWN e oa brogarourien anezho, e varvjont evit Kembre hag e tellezont bout enoret.

Ar BBC ne vez ket atav challet ma vez distreset ar c'helaouadur gantañ. A gement-se em eus skiant-prenañ. N'eo ket dav dezhañ teurel evezh ouzh klemmoù aozadurioù ha n'int ket kreñv, da lavarout eo pinvidik a-walc'h evit ober prosez dezhañ. Frankiz ar c'helaouerezh eo...

A. HEUSAFF

## Klasket o deus an Amerikaned saveteiñ ar ouestlidi e Teheran



Petra a zo tremenet e penn an Ao Carter? Abaoe mizvezhioù m'eo dalc'het ar ouestlidi e kannadti ar Stadoù-Unanet e Teherean, n'en doa savet nemet frazennoù a-enep gouarnamant Iran. Ha trumm en deus kaset ahont ur skipailh evit kerc'h-at anezho.

Dafjerus e oa ur seurt oberiadenn, hag e ouie mat e oa tost dibosubl he c'haz da benn hep ma c'hoarvezfe ur gwallzarvoud bennak.

Petra a zo c'hoarvezet? Perak eo deuet ar soudarded war o c'hiz pa oa dija kroget al labour? Ar Rusianed eo o deus goulennet digant Carter herzel diouzh anezho? Daoust hag eo lu Iran a oa war an dachenn evit o diarbenn? Pe daoust hag ez eus bet e gwirionez, evel ma lavare ar Prezidant Carter, ur fallaenn e daou eus an bifs askelloù, hag e vefe c'hoarvez et ar gwallzarvoud kenetrezo en ur vont en-dro?

Diaes eo gouzout pe hini eus an martezeadennoù-mañ a zo gwir.

Niverus ha liesseurt eo bet an emzalc'hioù dre ar bed goude ma skignas servijoù ar pempkogneg ar c'heleier diarbenn an afer-mañ.

Ha war zigreskaat ez a fizi-añs meur a vro e keñver ar Stadoù-Unanet. Gwir eo o deus kollet an holl emgannoù abaoe un dek bloaz bennak: Vietnam, Kambodj, Iran, h.a....

Roet en deus Cyrus Vance, Maodiern an Aferioù Diavaez e Washington, e zilies goude an darvoudoù. Lakaet en deus ar Prezidant Carter en e lec'h E. Newsy, senedour eus stad ar Maine.

Diouzh o zu o deus pennoù Iran lakaet ar ouestlidi e meur a lec'h tro-dro Teheran, evit ma ne vefe ket posubl d'an Amerikaned sevel adarre un oberiadenn evit mont d'o c'herc'hat.

o paouez  
dont er-maez  
(e galleg)

.TEULIAD: PLOGO 15 lur

.TEULIAD: Kelaouennoù  
Bro-C'hall enep FLB  
8 lur

embannet gant.  
Strollad Pobl Vreizh

EVIT O DEGEMER:

S.P.V., B P 120, 29200 BREST Cédex

## Brezhoneg war an azgwelerezh (video): un dudi a-bouez

Diskouezet eo e-pad foar etrevroadel Roazhon labour un nebeut tud eus An Naoned, de-dennet gant an azgwelerezh (video): un taol esa, hag un arnodenn a laka da soñjal n'emañ ket evit dilezel an doare-se a-raok pell. Enrollet o deus tout ar skingasadennoù "Breizh o vevañ" abaoe kala-geñver ar bloaz-mañ.

Labourat a reont hep klask "gounit arc'hant", hag e vijent prest da eilskoueriañ ar skingasadenn-mañ-skingasadenn evit ar re o defe c'hoant gwelout, adwelout pe brenañ anezhi. Skrivet o deus da FR3 evit gouzout petra a vije hervez al lezenn.

Tud all a zo dedennet gantê-se, e Pariz, Brest, Kemper... Setu perak Radio-Tele-Brezhoneg en deus goulennet n'eus ket pell e vije savet un azgwelva (videova) gant tout ar skingasadennoù "Breizh o Vevañ", en ul lec'h digor d'an holl (d.l.e. Agence Technique Régionale/Stal Amprestañ Binviou ar Rannvro, e Ploermeil).

Setu roll ar skingasadennoù

ho pije tu da welout e foar Roazhon: Gwez Kalonek ma Bro; Peizanted ar Gêr Vras; Ar Vreudeur Morvan ba'n o Bro; Labourerien ar Sukr; Mein o Kanañ; Bi ha Mai Bi, Bleimor; Buhez ar C'homuniou en Amzer a-vremañ; Youenn Gwernig; Labourat ba'n Istr; Barzhed war ar Maez; Bitekle (2 lodenn); Pesort Sonerezh en Dazonen?; Park an Arvorig. Ouzhpenn 6 eurvezh a vrezhoneg a zo kinniget eta da vrezhonegerien Bro Roazhon.

A-hend-all, tud 'zo o deus troet e brezhoneg bannoù treset evit ar vugale (dessins animés). Setu 'ta un arnodenn all savet dreist-holl evit bugale skolioù Diwan, met sur omp e vo tud all evit kemer plijadur deusouto. An abadennesa kentañ 'zo echu bremañ a bad war-dro un hanter-eurvezh war an azgwelerezh (benveg video).

M'ho peus c'hoant da gaout darempredoù diwarbenn-se, skrivit da "Strollad Klev-Gwel ar C.N.C.C.", 52 straed ar Marchiks, 44000 Naoned.

## Marv eo Hitchcock

Marv eo ar filmaozer Alfred Hitchcock dimeurzh e Los Angeles, anezhañ 81 vloaz.

Sinet en doa ur bern filmoù, eus ar re anavezetañ en istor ar fivf-skouennerezh, mestr ma oa deuet da vezañ war ar "suspence".

E 1925 eo en doa savet e film kentañ. E 1934 e kuitaas Breizh-Veur evit mont d'ar Stadoù-Unanet. Neuze e Los Angeles, e krogas evitañ un eil gwagen en e vicher, hag a voe derou ur steudad a filmoù ha ne oa ket c'hoazh echu. Pa 'z eo marvet e oa oc'h aozañ e 54vet film.

Graet e oa bet anezhañ ul lord (evel Charlie Chaplin). E-touez ar filmoù en deus kaset da benn, setu dindan ar pennad-mañ un nebeut eus ar re a zo bet gwelet ar muiañ.

## SPORTOÙ

### ABADENNOU MELLDROAD

-Rummad kentañ:  
Naoned 3/0 Lyon  
-Eil rummad:  
Roazhon 0/1 Tours  
Gwengamp 1/0 Blois  
Kemper 0/2 Orleans  
-Trede rummad:  
AS Brest 1/0 Poissy  
St Brest 0/0 US Ar Menez  
US Konkernev 3/0 Sant-Brieg  
-Pevarde rummad:  
Kemperle 1/2 Velos Gwened  
UCK Gwened 4/0 Kemper  
Sant-Nazer 1/0 Ansiniz  
Montroulez 1/1 Penmarc'h  
PTT Naoned 0/0 Kastell-Paol

### ABADENNOU MELLZORN

-Paotred; rann H:  
USAM Brest 19/18 CSC Ar Mans  
PL An Oriant 15/15 Plisbonneg  
HBC Naoned 17/18 PL Avranch  
-Merc'hed; rann B:  
AS Brest 21/24 SC Angoulême  
-Merc'hed; rann E:  
JS Karanteg 14/8 EC Orleans  
CDN Ar Folgoet 13/18 Billancou

### UR BREZEGENN VREZHONEK...

(kendalc'h ar bajenn 1)

Ar wech diwezhañ p'edon e-barzh an iliz-mañ a oa d'ar pemp a viz Meurzh, devezh broadel a Gerneveur. Savet eo bet un oferenn e kerneveureg, yezh kozh ha yezh nevez hor bro. Ar Gerneveuriz a goll e yezh e fin an tri-wec'hvet kantved, ha n'eo nemet bremañ ma vez adgomzet. Laouen en ul lavarout deoc'h e kresk kerneveureg kreñv oc'h-kreñvañ. Bezit sur, ho kenitirvi gerneveurek a daol evezh ouzoc'h evit ma na vo ket kollet ho yezh-c'hwil. Setu an abeg all perak e oa ken plijus selaou ouzh ho yezh implijet fenoz, ha selaou ouzh ho sonerezh dispar!

Trugarez vras deoc'h.

Dr K.J. GEORGE.

D'ar 16 a viz Ebrel 1980.

## en ur ger...

GWALLSKOUER AR BIGI TASMANTOU O FERC'HENN (PAVILLONS DE COMPLAISANCE)

An "Notis" e Naoned, en he bourzh martoloded gresian marnaonet. Memes mod evit ar pezh a sell ouzh an "Icaterini" e Brest. Ouzhpenn-se, ez int un danjer bras, ken fall eo stad ar batimantoù-se.

## estrenvro

● Bombezennoù o deus tarzhet dimeurzh e Teheran, marvus evit lod anezho. En ur fivf-skouennndi, en ur bank-ti hag e savadurioù all e oant bet lakaet.

● Ur gwalldaol a-enep d'ar Maodiern Bani Sadr a zo bet graet ivez dimeurzh.

● Dimeurzh he deus ar rouanez Juliana he dilez e-kerz ur brezegenn a zo bet skignet gant ar radio hag ar skinwel izelvroat. Dimerc'her eo he deus he merc'h Beatrix kemeret he lerc'h war gadorveur ar Rouantelezh.

Ul live eus ar re uhelañ eo hini ar bevañs er vro-se.

● Kannadti Bro-C'hall en deus kaset d'ar c'helaouennoù amerikan pep a bennad diwarbenn stad yezhoù Frañs. Hervezañ eo emskiantek bremañ hor gouarnamant eus talvoudegezh liested hor sevenadurezhioù, met treut e chom an dispignoù en o c'heñver, dreistholl evit ar pezh a sell ouzh ar stummañ kelennerien.

● E Londrez e talc'h ur bagad bihan a dud un 19 den bennak e kannadti Iran. Goulenn a reont e vefe dieubet ar ouestlidi e Teheran.

## FEST-NOZ DIWAN

Roazhon.- Ur fest-noz a vo aozet gant DIWAN e Roazhon, sal al Lisoù, d'ar Gwener 9 a viz Mae, da 20eur. Kaset e vo en-dro gant ar vuzisianed-mañ: Hoperien, Le Meur-Toutous, Nono, hag all. Seizh lur e kousto an abadenn. Aozet e vo gant ar skol DIWAN ha Skoazell-Diwan/Roazhon.

### AN AMZER

2 straed ar Richardiere  
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek

Rener ar gelaouenn:  
Mark DECAMBORG

### KOUMANANTOU:

6 MIZ (24 niverenn):  
Reizh: 36 lur  
Studierien, skolidi: 24 lur  
Skoazell: 40 lur  
9 MIZ (36 niverenn):  
Reizh: 48 lur  
Studierien, skolidi: 36 lur  
Skoazell: 60 lur  
12 MIZ (48 niverenn):  
Reizh: 72 lur  
Studierien, skolidi: 48 lur  
Skoazell: 80 lur

KRP(Decambourg):25.97V Roazhon  
CPPP 62319

Niver a skouerennoù moulet  
evit an niverenn-mañ: 1.000

## KELEIER BREIZH

Sant-Nazer.- An Ao Mace, ul labourer-douar eus Kernevel e-tal Gwennrann, ne felle ket dezhañ e vefe prenet douar da labourat gant tud 'zo o doa graet o menoz lakaat an douar-se da vezañ ul lec'h evit ar vakansourien.

Divizet en deus lezvarn Sant-Nazer e oa ar wirionez gant an Ao Mace, hogen, fellout a rayo d'an dud all marteze ma yelo an afer dirak lezvarn Roazhon. Forzh penaos, holl gouerien ar parrezioù tro war dro a zo kengret gant o c'henveur.

Naoned.- Re nebeut a arc'hant bepred gant aerborzh Kastell-Bougon.

Hervez Kambr Kenwerzh Naoned a ra war-dro an aerborzh, daou abeg a zo: da gentañ, harzlabour paotred an aer e 1979, met ivez ar mererezh o nac'hañ atav ma yelo taosoù an aerborzh war-raok.

## Mouezh an dileuridi

● An Ao Madelin, kannad Redon, a glemm rak ne vez ket ingalet trawalc'h a arc'hant evit Breizh gant kef etrec'houarn evit renkañ ar vuhez war ar maez (C.I.A.R.).

● An It Le Roux, eus Brest, kannadez e Parlamant Strasbourg, he deus enebet dirak Kuzul Enklask Brusel ouzh herzel hor bigi chaluter gant ar Saizon. Respont a ra ar C'huzul en deus klemmet eñ dirak lezvarn ar Marc'had Boutin (CEE).

● An Ao Mehaignerie, maodiern al Labourdouar, a damall ouzh an dreisttailh war al laezh bezañ un diezamat evit ar re yaouank c'hoant ganto ober saout-laezh.